

KANTIK N° NEVEZ

Ma Rédemption est dans le Ciel

gloire du Seigneur Eternel

ou

PASSION

POUR AUTOUR JESUS-CHRIST

Harvez en Avril


An Avril béni e vez d'ans
d'ant d'ant d'ant en O-rien

1911

1911

Moulliez en en Douchentil, 7

1911



Kantik en honor d'ar Zakrament (p. 4)



O Sakramant burzuduz, Leac'h omp maget gant



Jezuz ! Ennhan emañ Hor Zalver, Kredi a ran var he



elher, Ennhan emañ Hor Zalver, Kredi a ran var he elher

Kantik Hent ar Groaz (p. 6)



Hañtolomp-holl, hañtolomp a speread Jezuz he hag



ar C'hel var, Sonomp en he beredon ha let, Sonomp



an ho gent glae'her, O Salver Iarn a gaer an feiz



Dre ho korf hag ho peñ n'eu, Gant on zomp an tel a



den e, Pardonit hor peñ n'eu

KANTIKOU NEVEZ

Kantik en honor d'ar Zakrament. (1)

Var an ton gallek : O l'auguste Sacrement.

DISKAN :

O Sakramant burzuduz,
Leac'h omp maget gant Jezuz.
Ennhan emañ Hor Zalver;
Kredi a ran var he c'her. } bis.

Jezuz, d'an noz kent mervel,
'Ro galloud d'he Ebestel.
Da jench ar bara, ar guin
'N he gorf hag he c'hoad divin.

Ar veleien, d'ar gorreou,
A gonsakr gant he gomzou,
Ha Jezuz, mestr braz ar bed,
Ouz ho mouez a zent hepred.

Heb kuitat he varadoz,
E choum aman deiz ha noz ;
Choum a ra en hon touez
Dalc'het gant he garantez.

Euz ar guin hag ar bara
Petra joum ? Ne joum ken tra
Nemet ar spesou diste
A guz korf, goad Hor Zalver.

Aman n'hellomp ket koumpren ;
Ar feiz hebken hor c'helen...
Gant ar feiz sklerijennet,
Ne fazi ket hor speread.

E doare ar sperejou
Eo 'n em laket an hostiou.
Pa vez an hostiou torret,
He gorf sakr n'eo ket rannet.

Neb ia d'ar gommunion
Gant ar pec'hed 'n he galon
A gemer skouer var Judaz,
Hag a ra eun torfed braz.

Mes, pa vez, araok tostât,
Ar goustianz e stad vad,
Unanet gant Hor Zalver
Guir euredet e kaver.

Menlomp, karomp, adoromp
Eun Doue ker mad ouzomp.
Red eo sonjal dreist pep tra
En he zonezoun gaera.

Jezuz eo ar Roue braz ;
Adorit-hen var he groaz,
Hag en Ee, hag e myster
Sakramant sakr an Aoter.

(1) Great var batrom eur c'hantik gallek bet savet gant an Den
euruz Grignon Monfort.

Kantik an Oferen.

Ton : *O Katoun Zakr, pe : Euz a vremen.*

DISKAN :

*Kinnigomp-holl ar Zakrifis,
Gant hor mam zantel an Iliz,
Sakrifis divin Hor Zalver,
En em ginnig var an Aoter.*

1. E sakrifis an oferenn,
Jezus a ra d'he veleien
*Nevezi 'n eun doare dispar
Sakrifis braz Menéz Kalvar.*
2. An Oferen !... *Pebez tenzor !*
Dreizhi Doue a gav henor ;
Dreizhi e teu d'hon enêou
Bennoz Doue gant he c'hrassou.
3. Va Doue, deoc'h e kinnigan
Gant resped an oferenn-man,
D'hoc'h *adori* : da ziskleria
Ez oc'h hor Mestr, ha Mestr peb tra.
4. Ouzpenn, 'vit ho *trugarekât*
Da veza 'n hor c'henver ken mad :
Holl diganeoc'h hon euz bemdez
Madoberou, grassou nevez.
5. Siouaz ! 'n hor buez tremenet,
Omp kouezet mil guez er pec'hed ;
Jezus, dre verit ho poaniou,
Pardounit deomp hor pec'hajo.
6. Dre an oferenn-ma ive,
Plijet ganeoc'h, o va Doue,
Pa 'z eo ken paour hon enêou.
Rei deomp aluzen ho krâsou.
7. Kinnig a reomp an oferenn,
'Vit ezomou ar bed kristen ;
Mes, evit *tud ar barrez-ma*
E fell deomp pedi dreist peb tra.

8. Dre nerz ar zakristi santel,
Ra vo diouzomp kasset pell
Al leoudouet, ar gassouni,
Ar pec'hed vil, ar vesventi.
9. Ouz an *Anaoun*, o va Jezus,
Grit ive eur zell truezus ;
Ha varnho lakit da ziskenn
Ho koad sakr evel eur c'hlizenn.
10. Ra vo heb dale diboaniet
Hor c'herent hag hor mignouned ;
Roit dezho, dre an oferenn,
Ar peoc'h a bado da viken.
11. Guere'hez Vari, va Mamm garet,
E harz ar groaz ken glac'haret,
Va zikourit da skriva doun
Pemp gouli Jezus em c'haloun.
12. Ha c'houi, holl Zant ha Sentezed,
Ha c'houi, holl elez benniget,
Deomp holl roit skoazel ho peden
Da glevet mad an oferenn.

Kantik da Zant Jozeph.

Var don : *Guere'hez sakr.*

*Sant Jozeph, o patroun benniget,
E kreiz hon trubuilhou, ni c'houlenn ho skoazel.
Difennit, ni ho ped, hor bro' muiad-karet ; } bis.
Difennit an Iliz santel.*

Hirio 'n hor bro an drouk-sperejou
A zo evel dichadennet.
En ho enep, euz lein an envou,
Ganeoc'h ra vezimp difennet.
D'an Iliz sakr ha d'he mero'h hena
Satan a ra eur brezel kriz.
Hor bro e karfe digristena,
'Vit essoc'h diskar an Iliz.
Guechall ho peuz, enep Herodez,
Laket Jezus e savete.

Hirio, gant ar memez madelez,
Diouallit mad Iliz Doue.
Gevier ha breinadurez heuzuz
A bep tu deomp en em astenn.
Dioec'h ho bilim, Tad karantezuz,
O ni ho ped, deuit d'hon difenn.
Roit deomp bepred ho skoazel ner-
Da veva e guir gristenien, [Jezus,
Da gaout'veldoc'h eur maro euruz,
Hag ar baradoz da viken.

Kantik ar Zilvidigez.

Var don : *D'hor Mamm Santez Anna.*

*O Mari, o Mamm vad,
Grit deomp kompren erbad
Eo ar zilvidigez
Affér vraz hor buéz.*

Savetei hon ene
Eo al labour kenta
Merket deomp gant Doue
Da ober er bed-ma.
Peb hini n'hen deuz bet
Met eun ene ebken ;
Eur vech unan kollet,
Rapari n'heller ken.
D'in-me petra dalfé
Kaout madou ar bed holl,
Ma zaffe, da c'houde,
Va ene paour da goll ?
Talvout 'ra hon ene
Dreist an aour, ar perlez ;
Peb ene d'eun Doue
Zo koustet he vuez !

O pegen diskiant
Ha pegen didalvez
Eo an den dizeblant
Ouz he zilvidigez !
Pa deuo ar maro,
Diocthu vezimp barnet ;
Hon ene vit ato
Vo salvet pe zaonet.
Hirio e c'hellomp choaz
An ifern pe an Ee ;
Re zivezad varc'hoaz
E vezo marteze.
Chench a rankan hirio,
Heb dale tamm ebet.
Ah ! kousto pe gousto
Fell d'in beza salvet !

Kantik Sant Izidor, Patroun al Labourerien douar.

Var don : *Kelven, pe : Breuniez ar Feiz.*

DISKAN :

*Sant Izidor benniget, patroun al labourer,
Ra vo meulet hoc'h hano dre holl, e peb amzer ;
Al labourerien douar a c'houlen ho pennoz,
Ma vint ganeoc'h sikouret da vont d'ar baradoz.*

Izidor a oa ganet e Spagn, en eur gær vraz (1),
Hag eno a-vihanik 'vel eur zant e vevas.
Bet hen doa digant Doue kerent mad ha santel
Aketus da zoursial euz ene ho bugel.
P'e deut en oad Izidor da c'hounit he vara,
Da di eun den pinvidik ez a da zervicha ;
He vestr, hanvet Yann Vergas, hen doa kalz douarou,
Ha ganthan e oue karget da ren al labourou.
Euruz ar penn-tiegezh, pa c'hell fiziout peb tra
En dud a rank da gemer 'n he di da zervicha.
Euruz ar zervicherien a gav tiez kristen
Lec'h ma ve lezen Doue heuillet a benn da benn.
Bep mintin, sant Izidor oa fidel d'he beden ;
Bemdez zoken oa kustum da vont d'an oferen ;
He holl zevosionou vije achu abred.
Hag euz labour he zevez ne reant gaou ebet.
Daoust ma oa en he labour ar Zant direbech kaer,
Gual deodou hen tamallas divarhenn koll amzer ;
He vestr hen dije kredet, panefed ma plijas
Gant Doue, d'en didrompla, ober eur burzud braz
Mestr Izidor, eun devez, da c'hout ar virione,
A ia var he zouarou da ober eur bale.
Guelet 'ra he zervicher 'kreiz eur park oc'h arat,
Gant daou El guenn 'n he gichen, daou El o labourat !
Liez a vech, dorn Doue a reas burzudou,
Evit lakât da bara muioc'h he vertuziou ;
Eur vech, gant beg he c'harzou, 'n eur skei var an douar,
Ar Zant 'laka da zevel eun eienen dispar.
Meur a vech all, d'he vignoun Doue rentas henor :
Diou vech ar boued a greskas dre beden Izidor ;
Ar Zant a oa he galoun ker mad euz ar beorien
Ma kave gras ho guelet, ha rei d'e aluzen.
Ni labourerien douar, 'vel hor patroun ker,
Hervez bolontez Doue, implijomp hon amzer ;
Pedi, gouzanv, labourat, rei sikour d'an dud kez.
Eo merk ar vuez kristen, guir hent ar zantelez.
(1) E Madrid, kær-benn bro Spagn.

Kantik Hent ar Groaz.

Ober Hent ar Groaz a zo mont d'ar pevarzek Station, ha chom eur pennadik e pep hini anezho, da zonzal e Passion Hor Zalver, dreist holl er poaniou merket var bep taolen.

Lakât ar spered da zonzal a zo avoalc'h, heb na ve red ober a c'hinou an distera peden. Eun dra vad eo koulskoude lavaret, e pep Station, eur *Bater*, eun *Ave* hag eur *Gloria Patri*, gant eun Akt a Gontrision.

Devosion Hent ar Groaz a zo talvoudus meurbed d'an eneou kristen. Deski a ra dezho kassât muioc'h-mui ar pec'hed, ha karet Hor Zalver a greiz ho c'haloun. En eur ober Hent ar Groaz, e c'hellont ive gounit eun niver braz a Induljansou, pe evitho ho-unan, pe evit an Anaoun.

Var don : *Au sang qu'un Dieu va répandre.*

DISKAN (dirag an Aoter vraz) :

Heuilomp holl, heuilomp a spered

Jezuz betek ar C'halvar ;

Sonjomp en he boaniou kalet,

Sonjomp enno gant glac'har.

O Salver leun a garantez,

Dre ho kroaz hag ho poaniou,

Grit ouzomp eur zell a druez,

Pardounit hor pec'hejou. (1)

KENTA STATION

Jezuz kondaonet d'ar maro.

Da Bilat, 'vit beza barnet

Ez eo kasset Hor Zalver ;

D'ar maro ez eo kondaonet,

Daoust ma oa direbec'h kaer.

Ha, pa glev ar zetanz douget,

Ne ra ket eur glemmaden...

Pebaz skouer a basianted

Deomp-ni holl he ziskibien ! (2)

(1) En eur vont d'ar Stasion genta : *Sancta Mater...*

Pe e brezonek var ar memez ton :

Grit ma vexo, Mamm beniget,

Goullou Jezuz krusifiet

En hor c'haloun skrivet down.

Dirag ar Stasion : *Adoramus te, Christe.*

(2) *Pater, Ave, Gloria.*

V. Miserere nostri... Fidelitum... Sancta Mater.

En eur vont d'ar stasion genta : *Sancta Mater*, ha dirag ar stasion : *Adoramus te.*

EIL STASION

Jezuz sammet euz he groaz.

Gant he vourrevien d'Hor Zalver

Setu digasset he groaz.

Heb marc'hata e tigemer

Ar bec'h-se var he ziskoaz.

Jezuz, ar c'hroasiou hor bezo

Da zougen hed hor buez

Grit m'ho digemerimp ato

Gant guir feiz ha karantez.

TREDE STASION

Jezuz a gouez dindan he groaz.

Jezuz, dinerzet he vemprou

Gant ar goad hen deuz kollet,

'Gouez d'an douar; hag he boaniou

Gant al lamm a zo kresket.

Dre an tourmanchou ker skrijuz

Ho peuz 'vidomp gouzanvet,

Grit deomp ato, Salver Jezuz,

Chom heb koueza er pec'hed.

PEDERVED STASION

Jezuz a zigouez gant he Vamm zantel.

Prestik e tigouez Hor Zalver

Gant he Vamm muia-karet ;

Hag ho c'halounou ken tener

Gant ar boan a zo goasket.

Kalonou Jezuz ha Mari

Rannet gant hor pec'hejou,

Ni zlouallo da nevezl,

Divar vreman, ho poaniou.

PEMPED STASION

Simon ar Syrenëen a zikour Jezuz da zougen he groaz.

Aoun a zav gant he vourrevien

Ne varfe dindan he groaz ;

Lakât 'reont ar Syrenëen

Da rei dezhan eun taol skoaz.

Pa vez evidomp re bouinner

Ar c'hroasiou-rankomp dougen,

Tostañt ouzomp, o va Zalver,

Plijet ganeoc'h hor zouten.

CHUEC'HVED STASION

Ar Veronik santel a zec'h he vizaj da Jezuz.

En eur velet bizaj Jezuz

Saotret holl gant kranch ha

Ar Veronik trugarezuz [goad,

D'he gempen a gred tostañt.

'Vit an aktou da rapari

A ginnigimp d'Hor Zalver,

Diganthan omp sur, evelldi,

Da gaout ive grassou kaer.

SEIZVED STASION

Jezuz a gouez evit an eil guec'h.

Ken dinerz eo breman Jezuz

Ma kouez adarre, siouaz !

Hag, er stad-se ken truezuz,

He boaniou zo kresket c'hoaz.

O va Zalver, eur vech savet,

Mar kouezan-me a neve,

Astennit ho tourn-benniget,

'Vit ma savin adarre.

EIZVED STASION

Jezuz a gomz ouz merc'hed Jeruzalem.

Pelloc'h, var an hent e tigouez

Eur rummad merc'hed euz kaer ;

Hirvoudi a reont gant truez

O velet stad Hor Zalver.

Hen ho c'helen da skuill daelou

Var ar pec'hed kaoz d'he boan.

Var he boan, var hor pec'hejou

Gouelomp ive hon-unan.

NAVED STASION

*Jezuz a gouez evit an deirved
guez.*

Araok mont betek ar C'halvar,
Jezuz a gouez eur vech c'hoaz.
Daoust d'he boan, ha daoust d'he
[c'hlae'har

A nevez e samm he groaz.
Jezuz, 'n eur zével heb dale,
C'houi ro deomp-ni eur gentel :
ania, mar kouezomp adarre,
Poania buhan da zével.

DEKVED STASION

*Jezuz tennet diganthen
he zillad.*

Var ar menez pa zigouezas,
He vourrevien tud diroll,
He vourrevien hen diviskas
Dirag daoulagad an holl.
Dre ar boan ho peuz gouzanvet
Er stad-se, o va Jezuz,
E paeit ar poaniou dlêet
D'an holl bec'hejou mezuz.

UNNEKVED STASION

Jezuz staget ouz ar groaz.

Da rei evidomp he vuez
Jezuz hen deuz eur c'hoant braz,
Ha, poulzet gant he garantez,
En em astenn var he groaz.
Ouz ar groaz raktal eo tachtet
Dre zaouarn he vourrevien,
Red e ve kentoc'h lavaret :
Dre zaouarn ar bec'herien !

DAOUEKVED STASION

Jezuz a varv var ar groaz.

Goude telr heur poaniou skrijuz,
Poaniou 'vel ne oue biskoaz,
Siouaz ! setu maro Jezuz...
Stouomp holl dirag he groaz !
O Mari, dre ho rann-galoun
Dirag Jezuz o vervel,
Diganthan goulennit 'vidoun
Eur maro mad ha santel.

TRIZEKVED STASION

*Korf Jezuz distaget ouz ar
groaz.*

Gant daou ziskibl trugarezuz
He gorf sakr zo distaget ;
'Tre divreac'h he Vamm druezuz
Ez eo laket gant resped.
Pa zaimp dre ar gommunion
Da reseo korf Hor Zalver,
D'hen reseo gant devosion
Hor zikourit, Mamm dener.

PEVARZEKVED STASION

Korf Jezuz lakeat er bez.

Setu breman he gorf maro
Sebeliet, douget d'ar bez ;
Mes, d'an trede deiz, ac'hano
E savo leun a vuez.
Va c'horf-me ive a ranko
Mont heb dale d'an douar.
O va Jezuz, grit ma savo
Eun deiz d'an Ee leun a c'hloar.

HENT AR GROAZ

Peden da lavaret dirag an Aoter vraz.

O Jezuz, va Zalver karantezus, setu me aman daoulinet
gant resped dirazoc'h. Deuet oun da c'houlenn ho trugarez
evidoun va-unan, hag evit Anaoun keiz ar Purgator. Plijet
ganeoc'h lakât da dalvout evit silvidigez va ene ar meri-
tou ho peuz gounezet dre ar poaniou ez an brema da zonjal
ennho.

O Mari, o Mamm druezus, grit m'am bezo perz en druez
hag er garantez a loa en ho kaloun, p'edoc'h o vont da heul
ho Mab divin var hent ar C'halvar.

En eur vont d'ar station genta : *Sancta Mater*, ha dirag ar sta-
sion : *Adoramus te*.

STASION GENTA. — *Jezuz kandaonet d'ar maro.*

O Jezuz va Zalver, me eo emeuz tennet varnoc'h dre va
fec'hejou an holl boaniou a c'houzanvit. Me eo, siouaz ! ar
penn kaoz, ma 'z oc'h bet kondaonet d'ar maro. Roit d'in ar
c'hrass da gaout eur guir geuz d'am pec'hejou, ha da rapari
an dismeganz emeuz great deoc'h. Evit ober pinijen, e fell
d'in, divar vremen, digemeret ar maro, hag ar seurt maro a
garot choaz evidoun.

*Pater, Ave, Gloria, Miserere nostri, Fidelium, Sancta Mater
istud agas.*

EIL STASION. — *Jezuz sammel euz he groaz.*

O Jezuz, hervez ho kelennadurez : Pieu benag hen deuz
c'hoant da vont d'hoc'h heul, a die en em zillezel he-unan
ha dougen bemdez he groaz. Dirag komzou ken freaz n'euz
ket da varc'hata. Kousto pe gousto, red eo d'in digemeret
ar c'hroasiou, da lavaret eo ar poaniou hag an trubuillou
a gavin var hent ar vuez. Va zikourit, me ho ped, da zou-
gen anezho a galoun vad dre garantez evidoc'h.

TREDE STASION. — *Jezuz o koueza dindan he groaz.*

O Jezuz, ken dinerzet en em gavit, ha ken pounner eo ive
ar beac'h ho peuz da zougen ma kouezit d'an douar. Heb
dale avad e savit a-nevez gant nerz-kaloun.

Pa gouezan, siouaz d'in ! en eur pec'hed benag, grit d'in beza kourachuz avoalc'h evit sevel buhan dre eur guir bini-jen. Ha, da c'houde, kennerzit va bolontez, evit miret na vefen trec'het adarre gant ar memez tentasionoù.

PEDERVED STASION. — *Jezuz a zigouez gant he Vamm zantel.*

O Mari, Mamm dener, Jezuz ho Mab muia-karet a dremen dirazoc'h en eur stad truezuz meurbed. He velet a rit goal-gasset gant he vourrevien, ha beac'h ganthan o tougen eur groaz pounner ha mezuz. O pebez rann-galoun evidoc'h hag evit Jezuz he-unan ! Dre bec'hejou va buez oun bet kaoz da boaniou ho Mab, ha kaoz ive d'ho poaniou, Pardoun a c'houlennan a greiz va c'haloun da veza bet ken didruez en ho kenver.

PEMPED STASION. — *Simon ar Syrenéen a zikour Jezuz da zougen he groaz.*

O Jezuz, Simon Syrenée a ro d'eoç'h eun tamm skoazel da zougen ho kroaz. Plijet ganeoc'h ober kement all evidoun, ken aliez guech ma zeu eur boan benag da boneza varnoun. Gant aoun nag gollfen kouraj, harpit neuze va zempladurez en eur asten d'in ho tourn gallouduz.

Ha ma velan va nessa er boan hag en drubuil, ne joumin ket dizeblant en he genver. Hervez va galloud, e sikourin anezhan da zougen he groaz ha da zantellât he boaniou.

C'HUEC'HVED STASION. — *Ar Veronik santel a zec'h he pizaj da Jezuz.*

O Jezuz, ar Veronik, heb aoun ebet, a ia beteg ennoç'h a dreuz ar zoudardet a zo en dro deoc'h. Sec'ha 'ra gant eul lien ho pizaj gollet a c'houezen hag a voad. Var ar lien-ze, dre eur burzud, e oue merket ganeoc'h skeuden ho pizaj santel.

Egiz ar Veronik, ra vezin dispoint bepred dirag hoc'h enebourien. Karout a rafen ive rapari an dismeganz great deoc'h dre ar blasphemou. O va Zalver, sikourit ac'hanoun da verka em ene ho vertuziou divin, ma teuin muioc'h-mui da veza henvel ouzoc'h.

SEIZVED STASION. — *Jezuz a gouez evit an eil guech.*

O Jezuz, pa gouezit d'an douar evit an eil guech, e c'houlzanvit poaniou braz. Ho gouzanv a rit evidoun, abalamour

ma 'z oun bet koezet aliez er memez pec'hejou. Eur c'heuz braz emez dezho, ha, divar vrema, e vezin var evez, Guelloc'h e tiouallin diouz kement a c'helfe va lakât adarre da goueza er pec'hed. Gouzout mad a ran pere eo ar pec'hejou e koezan ennho aliesoc'h. Diouz ar re-ze dreist holl e fell d'in poania d'e em ziuall en amzer da zont.

EIZVED STASION. — *Jezuz o konsoli merc'hed Jeruzalem.*

O va Jezuz, klevet a ran ac'hanoc'h o lavaret d'eun nebeut merc'hed euz Jeruzalem : « N'a ouelit ket varnoun-me ; gouelit kentoc'h varnoc'h hoc'h-unan ha var ho pugale ».

Me ive, me va-unan a dlefe skuilla daelou c'houero, abalamour d'am fec'hejou tremenet. Ra zeuio da viana ar zont, anezho da ranna va c'haloun gant eur guir glac'har.

Da verc'hed Jeruzalem e lavarec'h ouzpenñ peger spountuz eo mervel e stad a bec'hed. Henvel ouz ar c'hoat sec'h, an den a vary er stad-se a zo strinket raktal, gant justiz ar Barner, e kreiz tan an ifern. O va Zalver, pa rankin mont euz ar bed-man, na bermettit ket e ve neuze va ene paour dizec'het gant ar pec'hed.

NAVED STASION. — *Jezuz a gouez evit an trede guech.*

O Jezuz, evit an trede guech, setu c'houi koezet adarre dindan ho kroaz. Ne veler ket ac'hanoc'h koulzkoade o fall-galouni. Sevel a rit c'hoaz eur vech ; sevel a rit heb dale tamm, evit kerzet a-nevez var hent ar C'halvar.

Ho skoueriou santel a ro sklerijen d'am ene. Koumpren a ran guelloc'h e tle an den, eur vech koezet er pec'hed, en em denna buhan-euz eur stad ken noazuz ha ken danjeruz. Koumpren a ran ive ne dleer morse disfiziout euz ho trugarez, neuz forz pegen aliez e vezer koezet er memez pec'hejou.

DEKVED STASION. — *Jezuz divisket gant he vourrevien.*

O va Jezuz, guelet a ran ho pourrevien didruez o tiffamma ho tillad diganeoc'h. Gouliou ho korf sakr 'zo digoret a-nevez, hag, euz hoc'h-holl izili, ar goad a red adarre muioc'h eget biskoaz. Poaniussoc'h e kavit c'hoaz an dismeganz a bouez varnoc'h, pa 'z oc'h divisket dirag an holl.

Dre ar boan ho peuz neuze gouzanvet en ho korf hag en hoc'h ene, roit d'in ar c'hrass da gaout ato heuz ha donjer ouz an holl bec'hejou mezuz.

UNNEKVED STASION. — Jezuz staget ouz ar groas.

O Jezuz, neuz den ebet evit kompren peger kalet eo ho poaniou, pa 'z eo staget ho korf sakr ouz ar groaz. Eun druez eo klevet an taoliou morzol a blant tachou braz en ho taouarn hag en ho treid ; eun druez ive ho kuele, savet en aer, ha dalc'het eno var bouez ar pevar goull great deoc'h gant an tachou. Setu aze al labour milliget emez great dre va fec'hejou. Keuz emez dezho ha pardoun a c'houlennan dre verit ho poaniou.

DAOUEKVED STASION. — Jezuz a varv var ar groaz.

O Jezuz, mil bennoz deoc'h da veza gouzanvet eur maro riz evit silvidigez va ene. Anez ho madelez hag ho truga-ez heb muzul, e oan kollet da viken.

Divar vrema, beteg fin va buez, e talc'hin da ziskouez deoc'h karantez evit karantez, ha da veza bepred anaoudek en ho kenver. P'e guir ez oc'h maro evidoun, e rankan da viana beva evidoc'h, en eur lakât e pep tra va bolontez a-unan gant hoc'h hini.

TRIZEKVED STASION. — Jezuz diskennet euz ar groaz ha lakeat etre divrec'h he Vamm zantel.

O Guere'hez santel, o Mamm glac'haret, anza'o a ran ez oun bet kriz ha dinatur e kenver ho Mab, hag en ho kenver hoc'h-unan. Ma n'euz breman etre ho tivrec'h nemet eur c'horf maro, dispennet a bep tu ha ruziet gant ar goad, me eo, slouaz d'in ! me eo a zo kaoz.

O Mari, plijet ganeoc'h kouzskoude ober eur zell a drugarez var va ene paour. Pardounit d'in an torfed heuzuz emez great, pa 'm euz lakeat ho Mab muia-karet d'ar maro. Goulennit diganthan, me ho ped, ma roio d'in ar pardoun euz va holl bec'hejou. Va zikourit ive da skriva doun em ene poaniou he Bassion.

PEVARZEKVED STASION. — Jezuz lakeat er bez.

O va Jezuz, gant daou euz ho tiskibien ez eo lianet ho korf santel. Gantho ive eo douget beteg ar bez, ha lakeat eno gant kalz a garantez hag a resped.

Pa blijio ganeoc'h disken em c'haloun dre ar gommunion, ho pet ar vadelez d'am zikour, ma c'hellin ho reseo e stad vad. Grit m'ho resevin bepred gant feiz, gant resped ha guir garantez. En doare-ze, oun sur e teuo da vir ar goulenn great evidoun gant ar belek, pa ro d'in ar gommunion : ho korf sakr a zlouallo va ene beteg ar vuez a bado da ziken.

Kenteliou ar Groaz.

Ton : D'hor Mamm Santez Anna.

DISKAN :

*Kanomp holl, kristenien,
Kanomp a vouez huel ;
Bremen ha da viken
Henor d'ar Groaz santel !*

Bepred, elec'h ma vo
Dirazhan Kroaz Jezuz,
Eur c'hristen a gavo
Kenteliou talvouduz.

Kroaz an tour

Divar beg an touriou
Ar Groaz lavar dalc'hmat :
« Kristenien, d'an envou
Savit ho taoulagad ! »

Kroaz an hent

Ar Groaz var an henehou
Lavar d'an tremener :
« Guir hent bro an envou
Eo hent Kroaz Hor Zalver. »

Kroaz ar ti

Dirag holl dud an ti,
Ar Groaz ouz ar voger
A zesk da bep hini
Derc'hel mad d'he zever.

Deski 'ra d'ar bugel
Beza bepred sentuz ;
Senti betek mervel
Zo bet buez Jezuz.

D'an tadou ha mammou
E lavar Hor Zalver :
« Beillit var eneou
Emez pignet ken ker ! »

Kroaz an ti d'ar c'hlanvour
Zo ive presiuz ;
Ennhi e kav sikour
Da veza gouzanvuz.

Kroaz ar gador-govez

Kroaz ar gador-govez
A ro keuz d'ar pec'her.
Pet eo ken didruez
E kenver he Zalver !

Kroaz ar beziou

Ar Groaz var ar beziou
He deuz eun nerz dispar
D'ober d'ar c'halonou
Dougen pouez ar glac'har.

Kroaz an aod

Ar Groaz, pa ve savet
E kichenik an aod,
A ro fizians bepred
D'ar paour kez martolod.

Kroaz ar varn diveza

Pa zeui, da fin ar bed,
Jezuz evel barner,
He Groaz a vo gulet
O lugerni en aer.
En eur velet ar Groaz
An dud fall a greno ;
An dud vad gant joa vraz
Er c'hontrol a drido.
Grit deomp, Salver Jezuz,
Dre verit ho poaniou,
Gant an holl dud euzuz
Mont neuze d'an envou.

PEDEN D'HOR ZALVER STAG OUZ AR GROAZ

*Indulgans plenier da
c'hounit pe evi-
domp hon unan
pe evit an Anaoun,
oar bouez : 1^o Ko-
vez ha kommunia;*



*2^o Lavaret pe kana
devot ar c'hantik-
ma dirag imaj ar
grusifi ; 3^o Pedi
evit ezomou an
Iliz.*

Ton : Elez euz ar baradoz.

Jezuz mad ha dous meurbed, dirazoc'h daoulinet,
Gant brassa nerz va ene, m'ho ped hag hoc'h asped
Da skriva d'in em c'haloun, da skriva ennhi don
Feiz, esperanz, karantez ha guir gontrision.

E kreiz va c'haloun ive lakit, o va Jezuz,
Da gorrija va buez, holontez vad, nerzuz,
Epad m'emaoun, gant glac'har ha gant karantez vraz,
O sonjal 'n ho pemp gouli, o sonjal ennho c'hoaz.

Dirazoun, Jezuz ken mad, e velan ar c'homzou
Hen doa ar profet David laket en ho kinou :
« Toullet ho deuz va daouarn ; va zreid ho deuz toullet,
« Ha betek va holl eskern gantho zo bet kountet. »

Kantik nevez evit Miz Mari.

Var don : O nag hir eo an noz.

Setu deut adarre miz Mae, miz ar bleuniou,
Ar miz he deuz choazet Rouanez an envou.

Aman, epad eur miz, e tiredimp bemnoz
Da veuli ar Vere'hez, da c'houlen he Bennoz.

Bemnoz, dirag he zron, gant guir fizianz ennhi,
Hor c'hantikou kaera en honor d'ar Vere'hez.

Bemnoz, dirag de zron, gant guir fizianz ennhi,
Devot ni lavaro : « Me ho salud, Mari ».

Bemnoz, vo mall ganeomp klevet he c'henteliou,
A zesko deomp guelloc'h kerzet var he roudou.

Ar boan a gemerimp ne vo ket poan gollet :
Varnomp nag a c'hrassou bemnoz a vo skuillet !

Mari, hor zikourit d'en em ziuall bepred
Dioc'h an diaoul milliget ha skoueriou fall ar bed.

Pa vo, gant ar glac'har, rannet hor c'halonou,
Ho pet ar vadelez da zec'ha hon daelou.

Bennigit hor c'herent hag holl dud ar barrez ;
Grit ma reno bepred an urz vad 'n hon touez.

Plijet ganeoc'h ouzpenn pedi 'vit an Iliz,
Ma kavo en hor bro ha peoc'h ha guir frankiz.

Da heur va zremenyan, o n'am dilezit ket ;
Difennit ho pugel enep an drouk-spered.

Ra vo ganeoc'h d'ho Mab kinniget va ene,
Ma vo ganthan raktal digemeret en Ee.

Kantik Bugale Mari.

TON : Ni ho salud, Rouañez an Elez.

DISKAN :

Guerchez Vari, pa 'z omp ho pugale,
Plijet varnomp beilla e pep mare.
Goulennit deomp digant ho Mab Jezuz
Buez santel hag eur maro eürüz.

Pebez gened eo gened ar Verc'hez,
Krouet dinan ha leun a zantelez,
Mil guez splammoc'h eget bolz an envou,
Mil guez kaeroc'h eget ar bokedou !

Bugel Mari a dle, evel he Mamm,
Kaout eur galoun hepred pur ha divlamm,
Poania ouzpenn da lakât he ene
Kaeroc'h kaera bemdez dirag Doue.

Buez Mari, epad he yaouankiz,
Oa direbech ha santel e peb giz.
Plijout d'ar bed ne c'hoantêas morse ;
Kaloun Mari a oa holl da Zoue.

Ne vo biken guir vugel d'ar Verc'hez
Neb a garo ar bed, he follentez.
D'ar Verc'hez pur e plij 'n lie bugale
Al lilien, skeuden ar burete.

Bugel Mari d'an holl, gañt guir aked,
A dle deski lezen ar barfeted.
He dever eo, e peb lec'h ha bemdez,
E pep doare, beza skouer ar barrez.

Evit senti ouz mouez he Mamm dener,
Evit digoll Kaloun dous Hor Zalver,
Bugel Mari aketuz a dosta
Ouz an daol zakr hep miz da nebeuta.

Bugel Mari da bep reunion
A zeu fidel, a zeu a vir galon.
Eno e poagn da zelaou, da bedi ;
Eno e kan henor, gloar da Vari.

Cantic kleyer nevez Enez Sun.

DISKAN :

Savtt, savtt ho mouez
Kleyer kaer Enez Sun !
Dougitt eus tour hor parrez
Bemdez edoug ar zun
Dougitt beteg hor zalver
Hor guella pedennou
Ha e skutllo diniver
Varnomp e vennoziou.

Kleyer névé kaer guisket
Evit ho padiziant,
Dizale e vo klevet
Ho son skiltrus ha drant
O nijal dreist ar parou
Douguet gant an avel
O kas beteg an Envou
Hor pedennou santel.

Teir guez bemde ho mouez
Nijo dreist hon oehou
Evit meuli ar Verc'hez
Hag en tiegeziou.
Ni a lavaro neuze
Peden an Angelus
En eur bedi mamm Doue
Hor mamm karantezus.

Ho mouez hag hon hini
Ne raint nemet unan
Ni ho klevo o seni
O vralia da embann

Eur vadiziant, eun eured
An offisou santel.
Laouen vo ouz ho klevet
Kalon peb den fidel.

Ha pa deuto ar maro
Eun dervez d'ho guervel
C'houi ive a lavaro
Gant an holl dud fidel
C'houl lavaro da Zoue
Selaou hor pedennou
Ha digemer hon ene
Buhan bars an Envou.

Kanitt, kanitt da Zoue
Bennoz ha meuleudi
Ha sikourit hon ene
Bemdez evit pedi.
Gant holl kleyer Breiz-Izel
C'houl kleyer hor parrez,
Hon dalc'hitt bepred fidel
Da Zoue, d'ar Verc'hez.

Cantic ar Barados.

DISKAN :

*Barados dudius
Bro ar zent eo va brô.
O pegen eürus
E vezimp eno ato !*

Eus ar bed-ma poanius
Peur e zin-me d'an Envou !
Pell diouzoc'h, va Jesus,
N'eus nemet poan ha daelou.

O pegen glac'harus
Eo beva gant ar pec'het !
Peur eta va Jesus
Peur 'hellin-me ho kuele !

Nos ha de va Jesus
E lavaran o vouela :

Peur er bed-ma poanius
Echui va heur diveza !

Skulz ha melkoniet
En draonien-ma a zaelou
Plijet Jesus plijet
Va diguemer en envou !

Neuze e tremeno
Ar boan, ar spont, an anken.
Neuze me a gavo
Ar peoc'h, ar joa da viken.

O peoc'h ha joaüstet,
Va Jesus o va Doue,
O pebeus eürusted
Epad an eternité.

INDULJANZ AR MARO MAD

Hon Tad Santel ar Pab hen deuz bet ar vadelez da lakat
Induljanz braz ar maro mad kalz aesoc'h da c'hounit. Peb
hini a c'hello breman gounit an Induljanz-se, epad zoken
ma vezo c'hoaz var he yec'hed, hag e talvezo dezhan a benn
ma rento he ene da Zoue. N'euz ken d'ober nemet mont
da govez ha da gommunia (d'an deiz ma karer) ha, goude
beza kommunit, kana pe lavaret devot ar beden-ma :

Ton : *Elex euz ar barados.*

O va Aotrou, va Doue, n'euz forz pe seurt maro
A garot choaz evidoun, me fell d'in hen reseo ;
Euz ho tourn, a greiz kaloun, m'en reseo a-vrema,
Gant holl anken ha poaniou va amzer diveza.



PASSION

HON AUTROU JESUS-CHRIST

Hervez an Aviel

An aviel pehini a vez canet dissul Bleuniou en Oferen

Var don : *Vexilla Regis prodeunt.*

Saludi a ran Jesus
Ac he bassion truezus ;
Ra vezo skrivet em c'halon
Jesus ac he holl bassion.

Tad eternal d-e-hoc'h ec'h ofran
Dre zourn Mari, ar salud-man.
Evit ma vezin pardounet
Dre verit ho Map benniguet.

Speret-Santel me ho supli,
Grit d'in ar c'hras da saludi,
Gant eur guir regret em ene,
Passion Jesus, va Doue.

D'he ziskibien e lavare
Jesus kent Pâsc var dro daou ze :
Map an den a vezo livret
Evit beza crucifiet.

Neuze prinset ar veleien
Ac eus ar bobl re anclen
Da gonferi en em gavas
E ti ar pontif Calphas.

Cuzul a rejont entre-z-o
Da lacat Jesus d'ar maro,
Non pas eme-z-ho, deiz ar gouel
Na zeue eur revolt da sevel.

Jesus o veza en eun ti
Da Simon lovr e Bethani
E tostaas out-han eur vaoues
Ac a voa guir benitantes.

Hon-nes var he ben a scullas
Pa edo o tibri he repas,
Eun ongant ar preciussa
Gant eur c'houes an excellanta.

He ziskibien a vurmuras
Dre ar goal exempl a Judas :
Perac, em-z-ho, e collar,
Eun dra zo ken ker ?

Ma vije guerzet an ongant,
E vije savet fors archant
Evit soulaji ar beorien,
Eme Judas, oc'h he repren.

N'oa ket ar beorien a glaske,
Laer oa, ac eur ialc'h a zougue
Da receo an aluzennou
A veze offret d'hon Aotrou.

Perac, eme Jesus neuze,
E reprenit-hu evel-se
Ar vaoues-ma, pa e deveus gret
Un œuvr-vad brema em andret

Rac o teurel var-n-on he ongant
E tiscleri va enterrant ;
Dre holl e vezo dre ar bed
Ar pezh e deus gret, publict.

Judas a ias neuze-souden
Da gaout princet ar veleien ;
Petra reot-hu d'in-me, eme-z-han,
Ha me libro d'e-oc'h anezhan ?

Prometi a reont en instant
Rei d'ezhan tregont pezh arc'hant ;
Ha nemet ar gommodite
D'he livra d'ezho, ne glasse.

Diskibien Jesus goude-ze
A c'houlennas out-han ive ;
Peleac'h ez aimp da brepari
Ar Pasc d'e-oc'h evit he zibri ?

It e kear da gaout eur certen,
Ha livrit d'ezhan evellen :
Tost, eme ar mestr, e va amzer,
D'ho ti ar Pasc ez an da ober.

He ziskibien a breparas,
Ar Pasc el leac'h ma lavaras,
Ha gant-ho var an abardaes
Ez eas ous taol var he c'hourves.

Pedont o fibri ho repas,
Evellen-out-ho e gomsas :
Unan a die eus ho toues
Va zrahissa e guiriones.

Peb hini trist oc'h he glevet,
A gommansas da lavaret :
Autrou, ha me eo, ha me eo,
Jesus a respontas d'ezho :

Er plad gan-en nep a laca
He zorn, a die ma zrahissa ;
Map an den a ia en effet
Dious ma'z eo anezan skrivet.

Hoguen maleur a c'hoarvezo
Gant an den-ze am zrahisso ;
Guel vije d'ezhan hep mar ebet
Na vije bet biscoas ganet.

Judas pini en trahissas,
Out-han ive a c'houlennas :
Ha me 'ta, mestr, e ve hennez ?
Lavaret, emean, e gan-ez.

D'he ziskibien neuze e voale'has
Ho zreid, hep excepti Judas,
Ho sec'has gant eul lianen
Var he zaoulin, en noas he ben.

Gant eur garantez ar vrassa
Pa oant gant-han da goania
Ec'h instituas hor Salver
Ar sacramant eus an auter.

D'ezho er goan-ze diveza
E roas da zibri ha da eva
Ar bara chenchet ac ar guin
En he gorf ac en he c'hoad divin.

Ne evin mui diver brema,
Eme Jesus, eus ar guin-ma,
Ken a zo em rouanteles,
Eleac'h ma evin guin nevez.

Goude ma ho devoa coaniet ;
Judas digant-o sortiet,
Ac o veza canet an hymn,
Ez ejont varzu ar jardin.

Antreet er jardin Olives,
Kemeret Per, Ian ha Jackes,
E lavaras Jesus d'ezho :
Trist e va ene bete'r maro.

Pelleet diout-ho gant glac'har,
En em brosternas d'an douar,
An ec'h adressas he beden
D'e Dad eternal evellen :

Mar d-e possubl, va Zad divin
Pellaet ar c'halir-ze diouz-in :
Mæs bezet gret ho polonte,
Non pas va hini me ive.

A ben teir gueach he orason,
A eure er memes fæson :
Ac e teu c'hoas d'he redoubli,
O veza couezet en agoni.

Dreizan eur c'hôuezen vras divad
A zéuas eguis baradou goad,
O coueza eno diout-an,
Ken a boullade dindan-han.

Chetu diskennet eus an Ee
Eun Ael d'he gonforti neuze ;
Hac o veza gret he beden,
E teuas da gaout he ziskibien.

Mæs allas ! cousket ho c'havas,
Rac-se d'ezho e lavaras :
Dihunit ha grit orason,
Na gouessac'h en tantation.

Livret vezin brema soudan
Etre daouarn ar bec'herien :
Savit ha deomp : tostaat a ra
Nep zo erru d'am zrahissa.

N'en devoa ket c'hoas echuet
He gomsou, ne doa erruet
Judas er jardin d'anter-nos
Gant eur vanden tud armet-clos.

An treitour a dostaaz out-han
Evit ober eur poc d'ezhan :
O lavaret, Ave, Rabbi,
Dont a ran, mestr, d'ho saludi.

P'evit tra, eme hor Salver,
Ez oc'h-hu deut, ma mignon ker,
Penaus, Judas, ac er guis-se
Gant eur poc em zrahissit-me ?

Ouz ar vanden-ze pa gomsas,
Piou a glaskit, a c'houlennas ;
Chetu hi neuze o lavaret :
An den Jesus a Nazaret ?

Me eo, a respontas Jesus :
Ous ar goms-ma ker grasius,
Var ho c'his en em retirjont,
Ac a stoc ho c'horf e couejont.

Mar d-e me, emeza, a glaskit,
Lesit ar re-ma da vont cuit ;
Eus he ziskibien e comze
D'ho lezel en ho liberte.

Per oc'h ho gullet o tostaat
Evit cregui en he vestr mad,
He gleze a zic'houinas,
Ha scouarn Malcus a drouc'has.

Jesus a respontas neuze :
List brema, Per, var gument-se ;
P'en deuz va zad presentet d'in
Ar c'halir-ma, sur hen evin.

Scouarn an den-ze a iac'has,
Ha d'ar vanden-ze e lavaras :
Gant clezeier ha gant bizier
Em c'hemerit evel eul laer.

Bemdes gan-e-hoc'h en em gaven
En templ o presec va lezen,
Hep e c'hallac'h cregui en-on ;
Brema hoc'h eus permission.

Evel bleizi 'ta var un oan,
E lampjont neuze var-n-ez-han,
Ac e oe gant-o goall-dretet
Ha stard gant kerdan amarret.

He ziskibien gant eur spont bras
O tec'het hen abandonas,
Ac hen o veza garrotet,
Da di ar Pontif e oe caset.

Var he zoctrin gant Caïphas
Interrojet, e respontas :
Publicamant em eus comset
D'an oll en templ en em gavet.

Peadra 'ta em interrojit
Var va doctrin pa 'z e public ?
Ar re zo bet oc'h va c'hlevet
A oar petra m'eus prezeguet.

Respontet gant-han evelen,
Unan eus an offiserien
A roas eur javedad d'ezhan :
Evel-se e comsez, emezan ?

Mar emeus, eme Vap Doue,
Drouc lavaret, discouezit-e ;
Mæs mar em eus lavaret mad,
Perac rei d'in eur javedad.

Clasc a reont eur fals testeni
Evit d'ar maro he gondaouni ;
Ha ne doa nicun suffisant
A guement test a voa presant.

Daou fals test a zeuas, a la fin,
Ac a zepose traou malin ;
Hoguen Jesus ne rea seblant
Evit ho c'hlevet o parlant.

Ar Pontif neuze a savas,
Ha d'hor Salver e lavaras :
Penaus, ne respontes netra
Ous an holl desteniou-ma ?

A-bers Doue me da gonjur
Da lavaret ha te eo sur
Ar Messias Map da Zoue ?
Ia, me en-deun, emezan, e

Hoguen me lavar d'e-hoc'h ouspen
E vellot eun deiz Map an den
Azezet en tu-deou d'he Dad
O tont d'ho parn var ar c'houabr.

Neuze ar Pontif a freuzas
He viscamant, ac a grias :
Chetu e o tont da vlasfemi ;
Pebes izom a desteni ?

Clevet hoc'h eus holl breman.
Petra sonjit-hu anezan ?
Oll e crijont, o lavaret :
Ar maro en deus meritet.

Neuze o commans d'he c'hoapaat
Ac en he visach da granchat,
E roent d'ezhan javedadou,
Taoliou dorn ha crabanadou.

Var he zaoulagad eur vanden
E lekejont en dro d'he ben,
O lavaret pa scoent ganta,
Divin plou a tarho brema ?

Cant cals ouspen a injuriou,
A vlasfemou ac a gestou
En outrajent oc'h invanti
Peb seurt fæson d'he dourmant.

Sant Per evit gouelet ar fin,
A i eas varlerc'h he vestr divin
Ac antreet e court Caïphas,
E-hars an tan ec'h azezas.

Eur servicheres o veza
Consideret piz aneza :
C'houi, emezi, a voa ive
Oc'h heul Jesus a C'halilee.

Dirac an holl Per en nac'has,
Ac evelen e respontas :
Penaus, maoues, me ne'oun ket
Petra fell d'e-hoc'h da lavaret ?

Da benn eun nebeut goude-ze
Eun all, d'ar poent ma sortie,
A lavaras : hema zo bet
Oc'h heul Jesus a Nazareth.

Per en disavouas adarre,
Oc'h assurti memes dre he le
Penaus n'anaie ket an den
Ma comzent aneza zoken.

Re-all en eur dostaat out-han,
A lavaras ive d'ezhan :
Eus he dud oud certenmant,
Rac anat oud dre da barlant.

Chetu en ous en em detesti
Hag o touet c'hoas mui-oc'h-vui.
Ne anaie ket an den-ze :
Ac e canas, ar c'hoc neuze.

Ous Per pa sellas hor Salver,
Sonch a zeuas d'ezhan eus he c'her,
Kent ma cano divonech ar c'hoc,
A-ben teir guech, Per, em nac'hoc.

E-meus o veza sortiet,
E vouelas drus Per d'he bec'het,
Ha Jesus a oue mintin-mat
Livret etre daouarn Pilat.

Judas o velet condounet
Hor Salver hep achap ebet,
A regretas he drahison
Gant eur c'heus a voa diræson.

Renta a reas d'ar re'ancien
Ha da brinset ar veleien
Ar som en devoa resevet
Digant-ho d'he veza livret.

Pec'hi ant euz gret emeza,
Enep Jesus oc'h he verza :
Goad eun den just ant eus livret,
Hep en devoa gret drouc ebet.

Pè soursi d'eomp-ni, emezo ?
Ni ne reomp forz ; evid-hoc'h eo :
Chetu en o vont-en he valer,
D'en em grouga dre zizesper.

Piou na scribe, o va Jesus,
O velet peguen danjerus
Eo dre eur goall gommunion
Ho trahissa en hor c'halon ?

En zo pernisius ive
An avaristet d'hon ene :
Pa denn d'eomp, evel da Iudas,
Abars ar fin eur maler bras !

Jesus dirac ar presidant
A voe accuset faussamant ;
Hoguen ne respontas netra
Evit en eun justitia.

Pilat ous Jesus a c'houlen
Ha c'houie e roue ar Iudevien ?
Va rouanteles, emeza,
Ned-e ket, eveus ar bed-ma.

Roue oc'h eta, eme Pilat ?
Il, c'houi en lavar erfat :
Evit souten ar virione,
Eme Jesus, oun deut ive.

Pilat, goude, d'ar Iudevien
Ha da brinset ar veleien
A lavaras : ne gavan ket
Coupabl an den-ma a grim ebet.

Hi mui-oc'h-vui a boursue,
Ar bobl, emezo, a drouble,
Oc'h ho dispos gant he zoctrin
D'en em revolti alafin.

Pilat o clasc en em viret
Ous peb seurt blam en he andret,
En ranvoyas da Herodes
A voa e kear neuze memes.

Hema en devoe eur joa vras
Jesus dira-z-han pa velas,
Dre an esperans d'he lacat
Da ober eur miracle bennac.

Ac o sonjal e contantehe
Jesus he gurioste,
Qunt-han forz traou a c'houlennas,
Maes hen biscoas n'en respontas.

Chetu neuze 'ta Herodes
Assambles gant tud he bales,
Oc'h he dreti gant goaperes
Ha gant cals a voufoneres.

Oc'he he veza guisket ouспен
Evel eur foll gant eur sae venn,
Ec'h eure he gass var he guis,
Da Bilat en eun dall iskis.

Neuze Pilat a lavaras
D'ar Iudevien pa ho assambles :
An den-ma n'en deus gret netra
Eus ar pezh a vlammit en-ha.

Herodes n'her c'haf ket ive-
Din d'ar maro mu' guet don-me ;
Rac se 'ta m'en laosco brema
Goude lacat he gastiza.

Chetu Pilat o tilesel
Jesus gant soudardet cruel,
Pere a zeuas d'he zivisca
Ac ous ar piller d'he staga.

Ar re-ma eguls diaoulou
Gant guial, kerdin, chadenoun,
A scoe var ar c'horf dilicat
Eus an oan dous ac egarat.

Kement her foetehont tro var dro,
Ma velent he eskern disolo ;
Adal ar pen betek an troad
Ne voa nemet gouli ha goad.

C'hoas ho devoe ar grisderi
Evel roue ar fars d'he dreti,
Ha da lacaat eur gurunen
Gret a spenn calet var he ben.

Goude o teurel var he gorf noas
Eur vantel bourpr dreist he zious-
E lekejont eur benduen [coas,
En he zorn deou, pe eur ganen.

Ac oc'h ober goap anezhan,
Ez eont d'an daoulin diraz-han,
En eur lavaret evellen :
M'ho salud, roue ar Iudevien.

En he visach sacr e cranchent,
Ac hep trues e kemerent
Eus he zorn santel ar ganen,
Evel skel gant-ha var ar pen.

Pilat evit touch calonou
Ar Iudevien ous hon Autrou,
Er stad-ze en discuezas d'ezho,
O lavaret : ECCE HOMO.

Sellit, chetu an den ama,
Trues a dleit da gaout out-ha ;
Evid-on-mie ne gavan ket
E ve coupabl a grim ebet.

Rac-se pa 'z eo deut an amzer
Da ziliyra eur prisonnier,
Daoust d'e-hoc'h pe Jesus ho pezo,
Pe'r muntrer Barrabas vezo ?

An dud fall-ze a gommanzas
Da grial : roit d'eomp Barrabas,
Ha casit hennas a-lesse ;
Crusifit-e, crusifit-e.

Mes Pilat a glaske ato
He ziliyra dious ar maro :
Hi arrajetoc'h a grie :
Crusifit-e, crusifit-e.

Pilat o velet mui-ous-vui
Ho revoltamant o cresski
A voalc'has neuze dira-z-ho
He zaouarn, o respont d'ezho :

Divlam'oun dious goad ar just-
C'houi a responto aneza ; [ma,
He c'hoad var-n-omp-ni ra gouezo
Ha var hor bugale, eme-z-ho.

Pilat d'ezho a ziliyvas
Dre eur respet humen Barrabas,
Ac a gondaounas hor Salver
D'ar maro er memes amzer.

Neuze 'ta e crocchont enhan
O rei eur groas pouner d'ez-han
Gant eun hu ac eur joa barbar
Evel he douguen d'ar C'halvar.

Eun den e bliou a dremene,
A c'halvet Simon Cirenee,
Ac a contrainchont d'he souten ;
Evel he sicour d'he douguen.

Gant cals a bobl ac a verc'het,
Pere a vouele, oa heuliet :
Maes Jesus o tistrei en dro,
A gomsas evellen out-ho :

Var-n-hoc'h ha var ho pugale
Gouelit, ha non pas var-n-on-me,
Rac chetu erru-eun amzer,
A nec'hamant ac a valer.

Neuze gart eur c'haoun diremet,
E commansint da lavaret :
Menezio, var-n-omp-ni couezit,
Ha c'houi, torguennou, hor c'huzit.

Rac mar d-eo evellen tretien
Ar c'hoad glas pe an den parfet,
Petra vezo an dretamant,
D'ar c'hoad seac'h pe d'an den
[mechant ?

Eun druez oa he velet
Gant ar groas pouner-ze grevet ;
Allas ! en he guen dindan-hi
Ez oa treus tri bis eur gouli.

Var ar memes pa erruas,
Ar vourrevien hen diviscas
Eus he sae a joa gret ep gri
Gant he vam ar Verc'hes Vari.

Jesus var ar groas astennet
A oe neuze out-hi staguet
En he dreid ac en he zaouarn
E oe plantet tachou ouarn.

Plou a ouffe, o va Jesus,
Compren on tourmant-ker grevus
A santchoc'h pa laosechont ho
[croas
En toull da goueza gant stroms
[bras !

Goude ma'z oa 'ta hor Salver
Crucifiet etre daou laer,
Var he zillat e oe taolet
Ar sort, ma vijent ingalet.

Neuze oc'h hija ho fennou,
Ac o lavaret blasphemou,
Evel gallout he ziptan
E comsent evellen out-han

Souez, mar d-oud Map da Zone,
Na ziskennas eus ar groas-se ?
Ar re-all en deus saouetet,
Maes en em saouetet n'ell ket.

Jesus elec'h goulenn venjans
Eus an hevelep disprijans,
Pardon d'ezho a c'houlenne,
Ac ous he Dad ho excuse.

He oll c'hoad o veza scuillet,
Ne alle mui gant ar sec'het,
Ac e roas an dud cris d'ezha
Guin-egr gant vesti evit eva.

Guelet he Vam e-hars ar groas
A greske cals he boaniou bras ;
Rac he c'halon a voa mantret
Ganteur glac'harestranch meurbet.

Tei heur en bues ous ar groas,
Var bouez an tachou e choumas ;
He dourmant o voa ken horribl,
Ma crene an traou insansibl.

Rac-se an eol a denvalaas,
Ar gouel en templ en em rannas,
An douar ferm a horjelle,
Ac ar mein cris en em fraille.

D'ar fin oc'h ober eur c'hri bras,
Jesus er groas a dremenas,
En he dourmanchou o vervel
Da rei d'eomp ar vuez eternal.

Goude he varo e oe ive,
Plantet eul lañs en he goste,
Ac e sortias dour ha goad
Anezhan, evit hon netaat.

Gant Joseph ha Nicodemus
E oe goude-ze corf Jesus
Eus ar groas santel diskennet
Var barien he Vam benniguet.

*Ar seis guer a brononsas hor Salver ous ar groas a gueffot
ive el levr-ma diaraoc en unecvet articl eus ar guenta fæson da
glevet an Oferen, o vedita e Passion hor Salver, var ar Pater
noster.*

REFLEXION HA PEDEN

Piou a ouffe consideri
An anken e devoe Mari,
Hep e ve touchet he galon
Gant regret ha compassion ?

Allas, emezl, va Map ker,
Allas, va Doue, va Salver,
Houma eo an ingrateri
Hoc'h eus-hu ranket d'anduri !

O caera den a oe biscoas !
Pe'stad oc'h-hu leket siouas !
Ne allan mui oc'h ho c'uelet,
Kement oc'h dishenvelebet.

Perac, va Jesus, va Doue,
Oc'h-hu merzeriet evel-se ?
Piou en deus gret d'ec'h-hu mervel,
Ha souffr tourmanchou ker cruet ?

Allas, pec'herien obstinet
C'houl hoc'h eus en evelen treet ;
C'houl hoc'h eus muntret evelen
Ma Map divin ; grit pinijen.

Ia, Guere'hes, m'her goar erfat
Eo me zo bet an den ingrat
Am eus er guis-se massacret,
Siouas ! ho Map mui a caret.

Rac-se pardon a c'houlennan
Digan-e-hoc'h ha digant-han,
Oc'h ho supplia da ober
Va feoc'h out-han dre ho tousder.

Perac, allas, na d-e rannet
Va c'halon gant eur guir regret
Da veza bet dre va c'hrimou
Roet ar maro d'am Autrou ?

Dessin am eus da veva guell,
Ac e choassan mil gueach mervel
Kent ma teuen dre nep seurt pe-
D'he grusifia mui nepret. [c'het

Pebes grasou a ouffen-me
Da renta d'ec'h-hu, va Doue,
O veza souffret evid-on
Eur maro cris a vir galon ?

Va Jesus, evit hoc'h enor,
Grit ma vezo va holl densor
Douguen gan-e-hoc'h ive bemdes
Ar groas bete fin va bues.

Me fell d'in chom hivisiken
E hars ho croas gant Madalen,
Evit gouela va fec'hejou
A zo bet caus d'ho tourmanchou.

Va c'hamp'r a rin eus ho costes
Da gontampli ar garantès
Hoc'h eus discuezet em andret,
Pa oc'h evid-on en em livret.

Evit bara ha souffransou
A servijo d'in, va Autrou ;

Evit breuvach ma gueimero [ro
Gant ho cuin-aer ho vestl c'houe-

Ho passion imprimet doun
Gant ho pemp goull em c'haloun,
Scrivit en-hi ho scourjezou,
Ho croas, ho spenn ac ho tachou.

En heur ar maro, va Doue,
Goalc'hit gant ho coad va ene,
Ha roit d'in dre ho passion
Eus va fec'het remission.

Corf Jesus a oe sebellet
Etoues eul lincer guenn meurbet
Ha lekeet en eur bes neve
Taillet er roc'h eno ive.

Ous an antre eus ar bez-man
Ez eo ruiellet neuze eur mean,
Pini a voa bras ha pounner,
Da serra var gorf hor Salver.

Eno erfin an teir Mari
A choumas da gonsideri
Pe fæson ha pe a gostes
Ez eo lekeet he gorf er bes.

Angoni Jesus er Jardin Olivet.

Var ton : Gant ar goad scuill va Salver.

Ebars er Jardin Olivet
Antreomp varlec'h Jesus ;
Contemplomb Redemptor ar hed
En e angoni poanias :
E galon beuzet er glac'har,
E zaoulagad en daelou,
Eo pleguet betec an douar
Dindan poez or pec'hejou.

Pebeuz burzud a garantez !
Cetu Mestr bras an envou
En em samet dre drugarez
A lousdoni or c'hrimou.
Pebeuz sam a boez varnezan !
Ar pec'hejou tremenet,
Ar re a goumsetter brema,
Ac ar re vo commettet !

Adalec ar pec'het quenta
Eus hon tad Adam guechall,
Betez ar pec'het diveza
Eus an diveza den fall,
Var e guén ho guelan berniet.
Pebeus sam a bec'hejou !
Goudeze bezit estonet,
Mar scuill quemént a zaelou.

Pec'her, te ac'h eus er guisquet
Eus a lornez da grimou ;
En dro dezan ec'h eus scoulmet
Eur c'houris a bec'hejou.
Penaus ec'h eus dishenvelet
Un Doue santel ha pur ?
Cetu ar froues milliguet
Eus da galon dinatur.

En eur stad quer vil, quen euzus,
E Dad en deus heug ounthan ;
E zaoulagad carantezus
A zistro divarnezan ;
Diaguent e vuya caret
A complezanç e galon,
Jesus brema so an objet
Eus e valediction.

Evit ma vije assuret
Eus an arret solanel,
En deus douguet en e enep
E tigez dezan un sel ;
En e zorn eur c'halir c'hoero,
Leun eus a ly or c'hirimou,
Ac en e voelet ar maro,
Froues trist ar pec'hejou.

O velet ne voa mui moyen
Da douch e Dad coleret,
E teu da gaout e zisquibien,
Allas ! ac'ho c'hañf cousquet.

Dilezet eo an abandon
Gant an dud a gant e Dad,
A nep-tu consolation :
Doue pebeus calonad !

Souden dioutho e pella,
Ac e commanç a nevez
Da hirvoudi ha da voela,
Gant ar spont ac an encres.
Arauc an tourmanchou garo
So evithan preparet,
Circonstanç ebet anezo
Ne all echap d'e speret.

En amzer eus e bassion
E souffro, a dra certain,
Poaniou bras, cals confusion,
Mæs an eil goude e ben.
Ama ho zant oll asambles
Evel bleizi arrajet ;
En eur mor a dristidiguez
E galon a so beuzet.

Enem velet a ra guerzet
Gant Judas, an treitour fall ;
Gant Per memeus e zeo nac'het,
Dilezet gant ar re all.
Deja e sant ar scourjezon
O tispenn e gorf santel,
L'ous ar groas he vemprou
Staguet gant tachou cruel.

Er guel a guer bras tourmanchou
Ec'h antren en angoni ;
Mæs er pez a gresq e boaniou
E zeo hon ingrateri ;
Pa vél quemént a souffrançon
Collet evit ar pec'her,
Ar goad eus e oll vemprou
Var an douar a ziver.

Deut da zestum ar beradou
Eus ar goad precis
A ziret, evel pizennou,
Eus a gorf divin Jesus.
O consideri e anquen

Ac e c'hlac'har diremet,
Dre zaelou eur guir binijen
Desquit goalc'hi ho pec'het.

Amen.

Peden da Jesus er Jardin Olivet.

Var ton : *E tal ho croas, leun a anquen.*

O va Jesus ! evidomp-ni
Beuzet en affliction,
Oc'h eus souffret un angoni
Din a bep compassion.

Jesus ! Jesus !
Ni so caus eus ho melcon
Pardon, pardon, va Jesus

Ar follentez euz va buez
Ha va direolamanchou
So caus eus ho tristidiguez
Ac eus oc'h oll souffrançon.

Jesus ! Jesus !
Grit d'in scuill eur mor zaelou
Var va buez malheurus.

Gant ar goad eus ho corf divin
Me garfe quemesq va goad ;
Mæs eus ar c'hrac-se oun indin
Rac bet e zoud re ingrat.

Jesus ! Jesus !
Ah ! sellit a druez ouzin !
Pardon, pardon, va Jesus !

Mil goech em eus ho trahisset
Evel an treitour Judas ;
Evel Per em eus ho nac'het,
A disanavet siouas !

Jesu ! Jesu !
Bezit truezus em andret :
Pardon, pardon, va Jesus !

Certen e vijen bet collet
Panaved an drugarez
Gant pehini oc'h eus souffret
Evidon-me pec'her quæz.

Bennoz ! Bennoz !
Va Jesus ! ra viot meulet
Er bed ac er Barados.
Evelse bezet græt.

TAOLEN

	PAJEN
1. Kantik en honor d'ar Zakramant	1
2. Kantik an Oferen	2
3. Kantik da Zant Jozeph	3
4. Kantik ar Zilvidigez	4
5. Kantik Sant Izidor	4
6. Kantik Hent ar Groaz	6
7. Hent ar Groaz	9
8. Kenteliou ar Groaz	13
9. Peden d'Hor Zalver stag ouz ar groaz	14
10. Kantik nevez evit Miz Mari	15
11. Kantik Bugale Mari	16
12. Cantic kleyer nevez Enez Sun	17
13. Cantic ar Barados	18
14. Induljanz ar maro mad	18
15. An aviel pehini a vez canet dissul Bleuniou en Oferen..	19
16. Angoni Jesus er Jardin Olivet.....	27
17. Peden da Jesus er Jardin Olivet	29

Imprimatur :

Kemper, 8 a viz Meurs 1941.

P. JONCOUR, *Vikel vras.*

Kemper, moullerez 7, ru an Dudchentil.